

Élisa Bleunven, Martine Kervestin,  
Émilie Sellin ha Jérôme Palud

Tresadennoù : Malo ar Menn



Teuliad ar skolaerien



## Ur ger evit digeriñ klaz

Un hentenn evit deskiñ lenn e brezhoneg e CP eo **Li Lo Lenn**. Savet eo bet ar c’hentelioù evit klokaat ha pinvidikaat al labour graet e galleg e-kichen.

Meur a ostilh a ya d’ober **Li Lo Lenn** :

- An teuliad-mañ, evit ar skolaerien, gant un araokaat war ar bloavezh-skol ha kinnigoù evit lakaat an traoù e pleustr a sizhun da sizhun.
- 16 kentel moulet war baper pe da bellgargañ dindan stumm fichennoù PDF.
- «[Ar c’hlasker gerioù](#)», ur benveg niverel evit kavout listennadoù gerioù a c’haller diskodiñ hervez un araokaat war ar skrivadoù bet choazet gant pep skolaer.
- Dafar all zo da bellgargañ war lec’hienn TES ([www.tes.bzh](http://www.tes.bzh)).

# Taolenn

## PRANTAD-SKOL 1

Sizhunvezh(ioù)	Roll-labour	Pajenn
1-2-3	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	4
4-5	<i>Deskiñ gerioù dre gomz. Stagañ gant al lenn hag ar skrivañ</i> .....	5
6	<b>Kentel 1</b> vogalennoù, ou-où, l, r, m, s, ch .....	6
7	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	10

## PRANTAD-SKOL 2

Sizhunvezh(ioù)	Roll-labour	Pajenn
8	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	10
9	<b>Kentel 2</b> vogalennoù, l, r, m, s, ch + <b>f, n, v, j, z</b> .....	11
10-11	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	12
12	<b>Kentel 3</b> vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z + <b>p, b, t, d</b> .....	13
13-14	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	14

### PRANTAD-SKOL 3

Sizhunvezh(ioù)	Roll-labour	Pajenn
15	<b>Kentel 4</b> E e Ar c'hantin .....	15
16	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	20
17	<b>Kentel 5</b> K k Kollet eo ar c'hartoù .....	21
18	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	22
19	<b>Kentel 6</b> C'h c'h Skol al loened .....	23
20	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	24
21	<b>Kentel 7</b> en enn Loened iskis .....	25

### PRANTAD-SKOL 4

Sizhunvezh(ioù)	Roll-labour	Pajenn
22	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	26
23	<b>Kentel 8</b> an ann añ Ar majisian .....	27
24	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	28
25	<b>Kentel 9</b> G g Gw gw Gwastell ar rouaned .....	29
26	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	30
27	<b>Kentel 10</b> in iñ Sac'h Milo .....	31
28	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i> .....	32

### PRANTAD-SKOL 5

Sizhunvezh(ioù)	Roll-labour	Pajenn
29	<b>Kentel 11</b> iv av ev Ar c'havr hag an dañvad	
30	<i>Deskiñ gerioù dre gomz</i>	
31	<b>Kentel 12</b> An dartzenn chokolad	
32	<b>Kentel 13</b> Ar piknik	
33	<b>Kentel 14</b> Kouezhet eo an dant !	
34	<b>Kentel 15</b> An euzhvil	
35	<b>Kentel 16</b> Al liorzh-kêr	

**EVIT DESKIÑ GERIOÙ NEVEZ** ..... 41

**UN DIBAB C'HOARIOÙ EVIT DESKIÑ GERIOÙ** ..... 42

— SIZHUNVEZHIOÙ 1 DA 3 —

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz. Roet e vint da lenn war-lerc’h er gentel 1. An dra-se a vo da zisplegañ d’ar skolidi er penn-kentañ.

*A-wechoù e vez lakaet diaes ar skolidi da lenn brezhoneg abalamour n’ouzont ket petra a sinifi ar gerioù a vez kinniget dezho. Bezañ ma c’hall ar skolidi dizoleiñ gerioù nevez dre lenn anezho, arabat e vefe re a c’herioù dianavez memes tra.*

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 1) : ar Sul • ul loa • chas • lus • mouar • lasoù • mourroù • cholori • un amiral • salsa • lous • sioul • moal • lichous • chuchumuchu

**Fonologiezh :**

— ar Sul : [z]

— sioul : ['siul]

**A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù**

Gwelet pajenn 41.

**B. C’hoarioù evit deskiñ gerioù**

Gwelet pajenn 42.

**1. Goustad**

Lakaomp : ul loa, chas, lasoù, mourroù ...

**2. Kim**

**3. Jestraouiñ**

Lakaomp : ul loa, chas, mourroù, chuchumuchu ...

**4. Divinadelloù**

Lakaomp :

— *Frouezh int. Er menezioù e vezont kavet peurvuiañ. Mouk e vezont. Petra int? (lus)*

— *Frouezh int. War ar c’hleuzioù e vezont kavet peurvuiañ. Du pe mouk e vezont. Petra int? (mouar)*

— *Gwalc’het e vez alies. Bras pe bihan e vez. Servij a ra da zebriñ. Petra eo? (ul loa)*

— *Loened int. Pevar fav o deus. Harzal a reont. Petra int? (chas)*

# Deskiñ gerioù dre gomz Stagañ gant al lenn hag ar skrivañ

## Gerioù da zeskiñ (kentel 1) :

- Gerioù desket er sizhunvezhioù 1 da 3 :  
ar Sul • ul loa • chas • lus • mouar •  
lasoù • mourroù • cholori • un amiral •  
salsa • lous • sioul • moal • lichous •  
chuchumuchu
- Gerioù all : ar mor • ul loch • imor •  
al loar • chas • rous • Rio • Lima • Rusia

## Fonologiezh :

- ar mor : [mo:r], hir ha serr eo an «o»
- ul loch : pouez ar vouezh war ar ger-mell  
«ul» (ger gant ur silabenn nemetken)

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

### 1. Goustad

Lakaomp : ul loa, chas, lasoù, mourroù ...

### 2. Prim!

### 3. Jestraouiñ

### 4. Posupl eo pe n'eo ket?

Lakaomp :

— *D'ar Sul ez a skolidi ar c'hasad CP d'ar skol.  
Posupl eo pe n'eo ket?*

— *Debriñ a ran soubenn gant ul loa vras. Posupl eo  
pe n'eo ket?*

— *Koñfitur am eus graet gant lus ha mouar du.  
Posupl eo pe n'eo ket?*

— *Lichous eo bugale ar c'hasad-mañ. Posupl eo pe  
n'eo ket?*

► *Diskouez Rio, Lima ha Rusia war ur gartenn  
vras.*

► *Deskiñ lenn ha kopiañ un nebeud gerioù.*

*Lakaomp : al loa, Sul, lus, ar mor, mouar...*

– *Choazet e vo gerioù gant skrivadoù bet studiet  
a-raok.*

– *War ar c'haier brouilhed pe war ar c'haier  
pemdez e vo kopiet ar gerioù. Skrivet e vint war  
an daolenn da gentañ evit diskouez penaos  
tresañ mat al lizherennoù ha liammañ anezho.*

## — SIZHUNVEZH 6 —

## Kentel 1

**Skrivadoù :** vogalennoù, ou-où, l, r, m, s, ch

**Gerioù-ostilh nevez :** ul, un, ur, eo, el, er, e, zo, ha



*El listenn a-us n'eus nemet gerioù-ostilh ha na c'haller ket diskodiñ hervez mont war-raok Li Lo Lenn. Evit deskiñ lenn anezho e c'haller lakaat ar skolidi da zigejañ anezho war-raok ha war-dreñv, goulenn kopiañ ha diktañ anezho... Displegañ d'ar skolidi e vo desket da vat lenn ar skrivadoù dianavez dezho diwezhatoc'h e Li Lo Lenn.*

la li ol ru ar lo ri il  
ma mo mi mou rou lu is  
os su soù as sa al cha  
och chu cho chou ous our

Savet eo bet mont war-raok *Li Lo Lenn* diwar an doareoù da vont war-raok a vez heuliet an aliesañ en hentennoù-deskiñ gallek. Neuze, ne zlefe ket bezañ a skrivadoù nevez, pe nebeut-tre anezho.

*Partir du graphème pour, sans détour par le dessin, apprendre à lire les syllabes qui le combinent, donne à la syllabe sa valeur de clé universelle pour la lecture de tous les mots. Avoir appris à décoder «pa» permet de lire «paquet», «campagne», «espagnol», «tapage», etc., ainsi que tous les autres mots contenant cette syllabe, à condition bien sûr que les autres syllabes de chacun de ces mots soient connues. Cela implique une progression suivie rigoureusement dans l'étude des graphèmes qui conduit les élèves à ne jamais être confrontés à des mots indéchiffrables, totalement ou partiellement.*

Guide Pour enseigner la lecture et l'écriture au CP, MEN, p. 25

— Pep hini a lenn didrouz (pe chuchumuchu) ul linenn pe ziv.

— Lenn a vouezh uhel silabenn-ha-silabenn : an holl asambles pe an eil goude egile.

— Ar skolaer a lenno goustad ar gerioù a vouezh uhel ivez. E-keit-se e vo ar skolidi oc'h heuliañ gant ar biz.

► Evel-just eo posupl labourat war ar c'henstrollañ diwar al listennad silabennoù-mañ. Lakaomp :

— Kopiañ silabennoù zo war an daolenn, ar vogalennoù e ruz hag ar c'hensonennoù e glaz.

ri lu cha

— Skeudenniñ ar mod da stagañ lizherennoù :

l i → li → li

a s → as → as

► Skrivañ silabennoù diktet gant ar skolaer zo d'ober ivez, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

*Il est parfois difficile d'obtenir d'un élève qu'il discrimine finement la différence entre «vache» et «fâche» à l'oral. En revanche, après l'étude des graphèmes /v/ et /f/, les exercices d'encodage feront apparaître les confusions. C'est alors que le professeur et l'élève pourront identifier et mettre des mots sur les «mal-entendus».*

Guide Pour enseigner la lecture et l'écriture au CP, MEN, p. 23

*Le cahier du jour est le support privilégié des activités d'écriture, de dictée et de copie qui vont [...] renforcer l'apprentissage de la lecture et de l'orthographe.*

Guide Pour enseigner la lecture et l'écriture au CP, MEN, p. 110

ar mor ar Sul ul loa chas al loch lus  
 mouar ar ru imor ar sal lasoù mourrou  
 al loar ul lama cholori un amiral ur roll  
 un ali malis salsa lous sioul rous asur  
 ral moal lichous mil chom chuchumuchu  
 Malo Maria Lila Rio Lima Rusia Raoul

- Pep hini a lenn didrouz (pe chuchumuchu) ul linenn pe ziv.
- Lenn a vouezh uhel ger-ha-ger : an holl asambles pe an eil goude egile.
- Ar skolaer a lenno goustad ar gerioù a vouezh uhel ivez. E-keit-se e vo ar skolidi oc’h heuliañ gant ar biz.

- Digejañ gerioù zo evit gallout anaout anezho buan war-lerc’h (c-h-o-l-o-r-i).
- Gwaregoù bihan a c’hall ar skolaer tresañ dindan ar silabennoù evit aesaat anaout anezho.

## cholori

- Deskiñ lenn ha kopiañ un nebeud gerioù. Lakaomp : *al loar, rous, Maria...*

War ar c’haier brouilhed pe war ar c’haier pemdez e vo kopiet ar gerioù. Skrivet e vint war an daolenn da gentañ evit diskouez penaos tresañ mat al lizherennoù ha liammañ anezho.

- Kopiañ gerioù war ar c’haier brouilhed pe ar c’haier pemdez.
- Skrivañ gerioù diktet gant ar skolaer zo d’ober ivez, war ur sklentenn pe war ur c’haier.

*Dielfennañ ar gerioù a-raok diktañ anezho.  
 Sachañ evezh ar skolidi war ar pezh a c’hall lakaat anezho diaes :*  
 – choaz mat ar skrivadoù ;  
 – tresañ mat al lizherennoù ha liammañ anezho mat.  
 E c’haller digejañ ar gerioù, dispartiañ ar silabennoù (tresañ gwaregoù) ...

Ar Sul zo.  
 Sioul eo ar mor.  
 Chas rous zo el loch.  
 Lus ha mouar zo er ru.  
 Chuchumuchu! Cholori zo er sal.  
 Lous eo ma lasoù.  
 Salsa zo e Rio.  
 Moal eo Malo.  
 Ul lama zo e Lima.  
 Lila zo o chom e Rusia.  
 Lichous eo Maria.



- Pep hini a lenn didrouz (pe chuchumuchu) ul linenn pe ziv.
- Lenn a vouezh uhel frazenn-ha-frazenn, an eil goude egile.
- Ar skolaer a lenno goustad ar frazennoù a vouezh uhel ivez. E-keit-se e vo ar skolidi oc’h heuliañ gant ar biz.

- En tamm labour lenn-mañ e vo adkavet gerioù bet lennet uheloc’h ha re nevez, a c’haller diskodiñ ivez. Gerioù-ostilh zo ivez. Lod anezho (zo, eo) a vo bet lennet a-raok ar gentel-mañ, e-kerzh ar sizhunvezhioù 1 da 5. Lod all (el, ul, emañ...) a vo lennet gant ar skolaer ma vez ezhomm. Desket e vo anaout anezho dre o stumm ortografek (digejañ anezho war-raok ha war-gil, ober «ur skeudenn» er penn...).

- Lenn a sinifi skeudenniñ ar gerioù dre ma’z eer war-raok evit ober ur seurt « film » er penn. Kement a vec’h a vez lakaet gant ar skolidi o tiskodiñ a-wechoù ma ne gomprenont ket ster ar frazennoù. Bez’ e c’hall ar skolaer lavaret peseurt skeudennoù a zeu dezhañ o lenn frazenn-mañ-frazenn. Lakaomp, gant ar frazenn « Chuchumuchu! Cholori zo er sal » :  
 « Gwelet a ran bugale o plantañ reuz er sal-glas. Lod o huchal, lod all o c’haloupat. Fchet eo ar skolaer. »

Er c’hentelioù all war-lerc’h e vo tro ar skolidi da lavaret peseurt skeudennoù a zeu dezho.

1 Skrivañ gerioù.




2 Skrivañ gerioù.


la .      . chous  
 li .      . sa  
 sal .     . soi

1. 


2. 


3. 


3 Skrivañ gerioù.




5

### Poelladenn 1

- Lakaat ar PDF a-wel d’an holl war an daolenn.
- Lenn an urzh-labour. Lavaret d’ar skolidi e vo skrivet gerioù diwar silabennoù en dizurzh. Ar gerioù a vo da skrivañ el linennoù Seyès dindan ar skeudennoù.
- Goulenn digant ur skoliad bennak lenn ar silabennoù a vouezh uhel. Marteze e vo ar wech kentañ d’ar skolidi ober ar boelladenn-mañ. Neuze e c’hallfe bezañ skrivet «cholori» war an daolenn el linennoù, ur wech kavet urzh ar silabennoù. Evel-se e vo sklaer d’an holl.
- Ma vez ezhomm e c’haller ivez sikour lenn ar silabennoù :
  - envel al lizherennoù ;
  - lakaat al lizherennoù e liv. Lakaomp : *cho*
  - skeudenniñ ar mod da stagañ lizherennoù. Lakaomp :



- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c’hlasad a-bezh pe gant ar skolidi unan-hag-unan.

### Poelladenn 2

- Lenn an urzh-labour. Lavaret d’ar skolidi e vo skrivet gerioù diwar silabennoù lakaet fas-ouzh-fas. Ar gerioù a vo da skrivañ el linennoù Seyès 1, 2 ha 3.
- Goulenn digant ur skoliad bennak lenn ar silabennoù a vouezh uhel. Marteze e vo ar wech kentañ d’ar skolidi ober ar boelladenn-mañ. Neuze e c’hallfe bezañ skrivet ur ger war an daolenn el linenn 1 gant ar skolaer (lakaomp : *lichous*).
- Ma vez ezhomm e c’haller ivez sikour lenn ar silabennoù (gwelet : poelladenn 1).
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c’hlasad a-bezh pe gant ar skolidi unan-hag-unan. Jestraouiñ ma ne gomprenont ket ster ar gerioù.

### Poelladenn 3

- Lenn an urzh-labour. Lavaret d’ar skolidi e vo skrivet gerioù diwar silabennoù en dizurzh. Ar gerioù a vo da skrivañ el linennoù Seyès a-zindano.
- Goulenn digant ur skoliad bennak lenn ar silabennoù a vouezh uhel. Marteze e vo ar wech kentañ d’ar skolidi ober ar boelladenn-mañ. Neuze e c’hallfe bezañ skrivet ar ger «lasoù» el linennoù Seyès.
- Ma vez ezhomm e c’haller ivez sikour lenn ar silabennoù (gwelet : poelladenn 1).
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c’hlasad a-bezh pe gant ar skolidi unan hag unan.

4 Lenn ha tresañ.

al loar	ar mor	ul loch
mourrou	ul loa	rous

5 Lenn ha tresañ.

Moal eo Malo.	Ul lama zo er ru.
Chas rous zo el loch.	

6

### Poelladennoù 4 ha 5

- Lezel un tamm amzer evit lenn ar gerioù hag ar frazennoù. An holl c’herioù zo bet lennet a-raok er gentel.
- En em asuriñ eo komprenet an urzh-labour gant an holl.
- E c’haller lenn a vouezh uhel ha degas soñj eus ster gerioù zo ma vez ezhomm.
- Lezel amzer da dresañ.
- Evit klozañ, sellet asambles ouzh an tresadennoù.

6 Skrivañ frazennoù.

Diagram showing word construction:

- Box 1: Sioul, Moal.
- Box 2: eo
- Box 3: Malo., Lila., ar mor.

1. Sioul eo Lila.

2. \_\_\_\_\_

3. \_\_\_\_\_

7 Skrivañ frazennoù.

Word cards: Loue, lasoù., ma, eo

Word cards: zo, ru., er, Mouar

Word cards: sal., zo, Cholori, er

\_\_\_\_\_

\_\_\_\_\_

7

### Poelladenn 6

- Lenn an urzh-labour. Lenn ar frazenn gentañ asambles. Diskouez mat ar bennlizherenn er penn-kentañ hag ar pik er fin.
- Displegañ e vo skrivet frazennoù all dindan, war al linennoù. Meur a ziskoulm zo, koulskoude e rank ar frazennoù bezañ gwirheñvel. Ar ger «sioul» a c’hall bezañ implijet div wech.
- Lezel amzer da labourat, pep hini e-unan pe daouha-daou.
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c’hlasad a-bezh pe gant ar skolidi unan-hag-unan.

### Poelladenn 7

- Lenn an urzh-labour. Lenn ar gerioù unan-hag-unan asambles. Degas soñj eus talvoudegezh ar bennlizherenn hag ar pik.
- Ober ar frazenn gentañ asambles ma vez ezhomm. Displegañ e vo skrivet frazennoù all dindan, war al linennoù. N’eus nemet un diskoulm bep taol.
- Lezel amzer da labourat, pep hini e-unan pe daouha-daou.
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c’hlasad a-bezh pe gant ar skolidi unan-hag-unan.

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 2.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 2) : farz-forn •  
fourmaj • forn • fulor • un iliz • livaj •  
ul louarn • louzoù • marmouz • sili •  
ur siminal • ur vi • sivi • noz • nijal • flour •  
farsus

## Fonologiezh :

- fourmaj, livaj : «j» a vez distaget [ʃ] e fin ur bomm.
- iliz, marmouz, noz : «z» a vez distaget [s] e fin ur bomm.
- siminal : «s» a vez distaget [s] pe [ʃ], hervez ar vro.
- ur siminal : «s» a vez distaget [z] pe [ʒ] goude ar ger-mell.

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

### 1. Prim!

Lakaomp : ul loa, chas, lasoù, mourroù ...

### 2. Kim

### 3. Lenn war ar muzelloù

### 4. Posupl eo pe n'eo ket?

Lakaomp :

— *Sili zo er stêr. Posupl eo pe n'eo ket?*

— *Flour eo ma c'hazh. Posupl eo pe n'eo ket?*

— *Livaj zo mat da evañ. Posupl eo pe n'eo ket?*

— *Renket em eus ma levrioù er siminal. Posupl eo pe n'eo ket?*

— *En Afrika e vez debret farz-forn bemdez. Posupl eo pe n'eo ket?*

— SIZHUNVEZH 9 —

# Kentel 2

**Kentel 2**

ni na no fo fu va vi fa  
aj za az fou fi zoù if vo  
ji jòù uj four mar for far  
jal mouz iza fro soul


un aval avaloù farz-forn ur film ur foar fourmaj  
forn fri fulor un iliz ilizoù livaj ul fouarn  
louzou al Lun Mamm marmouz ur sifri sifri  
ur siminal ur vi vioù sivi ur zoo noz nijal  
null fall ral fur flour farsus foll amorous  
avius Sina Anna Liz Liza Nina Soaz

Al Lun zo.  
Amorous eo Soaz.  
Avaloù zo er farz-forn.  
Ral eo vioù roz.  
Al luj zo o nijal.  
Sivùl eo an noz.  
Farsus eo ar marmouz.  
«Alo?» a lavar Nina.  
Flour eo fri al louarn.  
Vioù zo er siminal.



1. Skrivañ gerioù.

a leu      al mel      a mouz




2. Skrivañ gerioù.

1.      2.      3.      4.

fu • gal  
leu • lor  
mi • gfr  
far • sau

3. Skrivañ gerioù.

vous may four jam mar march sam may



**Skrivadoù :**

vogalennoù, ou-où, l, r, m, s, ch + **f, n, v, j, z**

**Gerioù-ostilh nevez :** an

Savet eo bet ar gentel 2 war batrom ar gentel 1. Neuze, e c'haller mont da welet an alioù-kelenn p.6 ma vez ezhomm.

**Labour skrivañ**

- Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.
- Skrivañ silabennoù ha gerioù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

**Deverioù**

- Lenn prim ar silabennoù.
- Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet her-vez barrezghioù hag ezhommoù ar skolidi.

1. Lenn ha dreuz.

roz	sivi	ur fri
ur vi	roz	un aval

2. Lenn ha dreuz.

Ruz eo an avaloù.	Livaj roz eo.
Sivi zo er forn.	Ar marmouz a ra luj.

1. Skrivañ frazennoù.

Flour → er → an marmouz  
Farsus → Lige  
Fur → al louarn

1. Flour eo al louarn.

2.


3.

2. Skrivañ frazennoù.

Roz er an marmouz fri

go fong fon er Anaba

Vioù er go far

 *Atav e ranker en em asuriñ e vo gouest ar skolidi d'ober an deverioù o-unan er gêr kuit da lakaat anezho diaes, hag o zud ivez.*

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz. Lennet e vint war-lerc'h er gentel 3.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 3) : bara •  
ur balum • ul lost • ur biz • bili • ul labous •  
ar mirdi • martolod • ur pod • pour • ur prof •  
poull-dour • ar plad • ur rod • un toull •  
lipous • plijus • labourat • dastum • lipat

**Fonologiezh :**

— labous : distagadur /a (hir).

**A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù**

Gwelet pajenn 41.

**B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù**

Gwelet pajenn 42.

**1. Goustad**

**2. Kim**

**3. Jestraouiñ**

**4. Divinadelloù**

Lakaomp :

— *Roet e vez d'ar vugale gant an Tad Nedeleg. (ur prof)*

— *Div zo war ur velo, peder zo war un oto. (rodoù)*

— *Pemp zo gant pep hini, war bep dorn. (biz)*

— *Glas ha gwenn eo. Mat eo er soubenn gant karo-tez. (pour)*

— *Brasañ loened a gaver war an Douar int. Krill ha pesked bihan a vez debret ganto. (ar balumed)*

— SIZHUNVEZH 12 —

# Kentel 3

**Kentel 3**

pa do dou ip od pou du  
ba bi bo bou at it ta ti  
toù ot to di ud ob tor  
tal poul dur pli par brou

bara albomou ur balum ul lost ur biz billi  
bloaz botou bouloù ul labous un dorn dour  
foto un istor un nadoz un oto ar mirdi martolod  
ur pod pour un ospital priz ur prof poull-dour  
ar plad pljadur ur rod ar Sadorn ur robot un toull  
un ti-post lipous mat bras du plijus labourat  
dastum dibab lipat Barbara Paloma Paolo Pariz

Ar Sadorn zo.  
Un toull zo en tapis.  
En albom email ar foto.  
O lipat ar plad email ar robot.  
Barbara a vo tri bloaz disul.  
« Alato! » a lavar Paloma.  
Bras eo ar balum.  
Ur prof zo en drit.  
Plijus eo dastum billi.  
Ul labous zo en oto.



1. Skrivañ gerioù.

nal bou le mar led lal co pi

2. Skrivañ gerioù.

min . . . . . pous  
pall . . . . . di  
li . . . . . dour  
li . . . . . pad

3. Skrivañ gerioù.

na dig ma dig al bou la bou

**Skrivadoù :**

vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z + **p, b, t, d**

**Gerioù-ostilh nevez :** en, war, emañ

Savet eo bet ar gentel 3 war batrom ar gentel 1. Neuze, e c’haller mont da welet an alioù kelenn p.6 ma vez ezhomm.

**Labour skrivañ**

➤ Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c’haier brouilhed pe ar c’haier pemdez.

➤ Skrivañ silabennoù ha gerioù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c’haier.

**Deverioù**

— Lenn prim ar silabennoù.

— Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet her-vez barrezhioù hag ezhommoù ar skolidi.

4. Lenn ha bremañ.

botou ur rod un oto

pour bara ur biz

5. Lenn ha bremañ.

Ur balum zo en dour. Lost al labous zo du.

Ur prof zo war an drit. Un toull zo en tapis.

6. Skrivañ frazennoù.

Ar mirdi . . . . .  
Al labous . . . . .  
Ar pous . . . . .

• du  
• bou  
• lipous

1. Ar mirdi zo bras

2.

3.

7. Skrivañ frazennoù.

dastum zo billi Plijus

O lipat plad ar emañ

pevar a vo krog Paolo

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 4.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 4) : per • mel •  
stered • ar bed • ur roue • un armel •  
un teod • ur bouteg • ur voger • boued •  
ar menez • karotez • kerez • nevez • pell •  
pounner • redek • bale • sevel

**Fonologiezh :**

— Gwelet penn-kentañ ar gentel 4 diwar-  
benn an doare da lavaret an «e» er gerioù.

**A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù**

Gwelet pajenn 41.

**B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù**

Gwelet pajenn 42.

**1. Prim!**

**2. Kim**

**3. Jestraouiñ**

**4. Posupl eo pe n'eo ket?**

Lakaomp :

— *Pounner eo an armel.*

— *Kerez ha per a vo da zebriñ er c'hantin.*

— *Boued lipous zo en armel.*

— *Bale a ra ar c'harotez war ar menez.*

## — SIZHUNVEZH 15 —

## Kentel 4

## E e

## Skrivadoù :

vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z, p, b, t, d + e

Gerioù-ostilh nevez : ket, gant, en deus

*Er gentel-mañ e kaver alies ar skrivad « e » abalamour da gustumiñ ar skolidi ouzh ar mod da lavaret anezhañ e brezhoneg, disheñvel diouzh ar galleg. N'eo ket nevez-nevez d'ar skolidi ar skrivad « e ». Un nebeud gerioù gant al lizherenn « e » zo bet roet da lenn e Li Lo Lenn a-raok. Adalek ar gentel 1 e kaver gerioù bihan evel er, el, eo...*

Lavaret e vez lavaret [e] :

– er gerioù gant ur silabenn nemetken pa vez ur gensonenn war-lerc'h, pe e fin ar gerioù : **pe**r, **me**l, ar **be**d, **pe**t, ur **roue**, **me**, **te**, **pe**.

– er gerioù meur a silabenn enno pa vez hir ar silabenn, pe e fin ar gerioù : **lune**doù, **stere**d, **pe**var, ur **mene**z, **kere**z, **ne**vez, **rede**k, **bale**, **se**vel, **dale**, **adare**, **mar**teze.

– nemedennoù : **pe**tra, **pe**rak (lavaret e vez [e] met berr eo ar silabenn).

Lavaret e vez [ɛ] :

– er gerioù gant ur silabenn nemetken pa vez meur a gensonenn heñvel war-lerc'h : **be**rr, **pe**ll...

– er gerioù meur a silabenn enno pa vez berr ar silabenn : **stere**d, **kourjete**z, **peroke**d, un **arme**l, ur **boute**g, ur **voge**r, ur **mene**z, **patate**z, **tomate**z, **karote**z, **banane**z, **kere**z, **ne**vez, **pounne**r, **rede**k, **se**vel.

**pe**r mel **lune**doù **stere**d ar **be**d ur **peroke**d  
**ur roue** un **arme**l un **teod** ur **boute**g **ur voge**r  
 boued **ar mene**z **gevier** **patate**z **tomate**z **karote**z  
 bananez **kere**z **kourjete**z **ne**vez melen **pe**var  
 pell **pounne**r echu **rede**k bale **se**vel dale **me**  
 te **pe** adarre **mar**teze **pe**rak **pe**tra Teo **E**wen

— Pep hini a lenn didrouz (pe chuchumuchu) ul linenn pe ziv.

— Lenn a vouezh uhel ger-ha-ger : an holl asambles pe an eil goude egile.

— Ar skolaer a lenno goustad ar gerioù a vouezh uhel ivez. E-keit-se e vo ar skolidi oc'h heuliañ gant ar biz.

► Digejañ gerioù zo evit gallout anaout anezho buan war-lerc'h (a-r-m-e-l).

► Gwaregoù bihan a c'hall ar skolaer tresañ dindan ar silabennoù evit aesaat anaout anezho.

## kourjetez

► Skrivañ gerioù diktet gant ar skolaer zo d'ober ivez, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

Lila zo o vale e Menez Are.

Bale, redek, bale adarre, redek adarre, pell ! pell !

Emañ o redek war ar menez. Badadaou !

Dale zo gant Teo. Kollet eo e velo.

Melen eo lunedoù Mia.

Hir eo teod ar peroked. Kontet en deus gevier.

— Pep hini a lenn didrouz (pe chuchumuchu). Hervez live ar c'hlasad e vo kinniget lenn kalz pe nebeut.

Ar skolaer a c'hallou ober goulennoù simpl evit bountañ ar skolidi d'ober « ur film er penn ». Lakaomp :

« E pelec'h emañ Lila o vale ? » ► e Menez Are

« Pe liv eo lunedoù Mia ? » ► melen

« Petra zo hir ? » ► teod ar peroked

E frazennoù zo ez eus traoù n'int ket anat da gompren, traoù empleget. An traoù-se a ranko bezañ sklaeraet d'ar skolidi. Lakaomp : « Hir eo teod ar peroked. Kontet en deus gevier. »

— Lenn a vouezh uhel frazenn-ha-frazenn, an eil goude egile.

— Ar skolaer a lenno goustad ar frazennoù a vouezh uhel ivez. E-keit-se e vo ar skolidi oc'h heuliañ gant ar biz.

## Er c'hantin

Boued lipous zo er c'hantin : patatez nevez, tomatez ha karotez melen.

« Mat eo ar boued! » a lavar Liza.

Ha n'eo ket echu : bananez, kerez ha chokolad.

« Me 'gav mat chokolad! Unan all 'mo! » a lavar Milo.

- Ar skolidi a lenn an titl.
- Evit aesaat al labour lenn e c'hall ar skolaer kontañ traoù diwar-benn an destenn. Lakaomp : « En destenn-mañ e vo anv eus daou gamarad-skol CP, Liza ha Milo. Er c'hantin emaint. »

- Ar skolidi a lenn didrouz (pe chuchumuchu) an destenn.
- Lod anezho a lavar ar pezh o deus komprenet.
- Ar skolaer a lenn an destenn a vouezh uhel.
- Diskouez ez eus klochedigoù en destenn. Displegañ e servijont da ziskouez ez eus unan eus an tudennoù o komz. Livañ ar frazennoù lavaret gant Liza ha Milo e daou liv disheñvel.
- Diskouez ar skeudenn d'an holl gant ar video-banner ha goulenn : « Petra a vez gwelet? » Reiñ skeudenn ar c'hantin da begañ er framm dindan an destenn.
- Adlenn an destenn diwezhatoc'h. Ur skoliad a raio perzh Milo, an eil Liza hag an trede an daneveller.







# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 5.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 5) : ur pok •  
ur pesk • skolidi • kastell • kaner • kador •  
kef • koad • kozh • kalon • pesketa

**Fonologiezh :**

— ur pok : [po/k], berr ha serr eo an «o».

**A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù**

Gwelet pajenn 41.

**B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù**

Gwelet pajenn 42.

**1. Goustad**

**2. Kim**

**3. Lenn war ar muzelloù**

**4. Divinadelloù**

Lakaomp :

— *Un ti bras eo. Gwechall e veze ur roue hag ur rouanez o chom e-barzh a-wechoù. (ur c'hastell)*

— *Pevar zroad zo dezhi. Azezañ a rez warni er skol pe er gêr. (ur gador)*

— *Bugale er skol. (skolidi)*

— *Tapet e vezont er mor. Lipous e vezont gant riz pe fritez. (pesked)*

— *Kontrol «yaouank» eo. (kzh)*

## — SIZHUNVEZH 17 —


## Kentel 5

## K k

**K k**


ur pok ar paskad ur rëpge ur bokedi ebokedad  
kamera kaier peak miz Kerzu kenta kub  
skol skoldi kastell muzik kaner kador  
koala kef koad matematik kalon karantez  
kaner kalet koch kalon barek chik diel  
dirak kalz kas pesketa redek kemer koll  
Kanada Korsika Rosko Katell Kaou

Kouezhet eo kador Katell.  
Dek koala zo o redek e koad Keroual.  
Tud chik zo o pesketa e Korsika.  
Kaner eo Kaou, plijout a ra kalz ar muzik dezhañ.  
Ar skolidi ne gavont ket mat kafe ha chokolad.



**Kollet eo ar c'hartoù**

Milo ha Liza zo e skol Rosko.  
« Kollet 'm eus kalz kartoù ! » a lavar Milo.  
— Klask dirak kador Katell, a lavar Liza.  
— 'N'eus ket ! a lavar Katell.  
— Sellet 'peus dirak an armel ? a c'houlenn Kio.  
— You'hou! Kavet eo an dek kartenn ! » a huch Milo.  
Ur pok a ra Milo war jod Liza !


**Skrivadoù :**

vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z, p, b, t, d, e + k

**Gerioù-ostilh nevez :** e-barzh

Savet eo bet ar gentel-mañ war batrom ar gentel 4. Neuze, e c'haller mont da welet an alioù-keleñn p. 15 ma vez ezhomm.



*Adalek ar bajenn-mañ e vo alioù-keleñn diwar-benn poelladennoù zo nemetken, hervez an ezhomm.*

1. Gwir pe gwr ?

Katell, Liza ha Milo zo e skol Rosko.

Kollet eo kartoù Katell.

Kartoù Milo zo dirak an armel.

2. Liemmet.

Milo • « Kollet 'm eus kalz kartoù ! »  
Liza • « Klask dirak kador Katell. »

3. Kalc'huzi ha loajuzi.

- Kartoù zo dirak an armel.
- Kartoù zo e-barzh an armel.
- Kartoù zo war ar gador.

4. Skrivañ gerioù.

ho chad ra ma ka pesk

5. Klasket ha skrivañ gerioù.

ha had ho

ala len ho

**Labour skrivañ**

- Kopiañ silabennoù, gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.
- Skrivañ silabennoù, gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

**Deverioù**

- Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet hervez barrezhioù hag ezhommoù ar skolidi.
- Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

**Poelladenn 7**

- Lenn an urzh-labour.
- Deskrivañ ar skeudenn asambles dre gomz.
- Lakaat ar skolidi da skrivañ ur frazenn bennak dindan an dresadenn. Evit sikour anezho e c'haller :
- Skrivañ ur goumoulenn gerioù war an daolenn.

ur pesk pesketa

ur varzh-pesketa

un neudenn dour

- Skrivañ ur frazenn bennak war an daolenn evit boulc'hañ al labour.



Lakaomp : *Paket en deus ur pesk.*

— Reizhañ pe divankañ al labour er fin.

6. Skrivañ ar frazenn.

Kaigrañ • dibedid • ar e • hanter • an alid  
• hanter • hanter • hanter • hanter

7. Skrivañ.

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 6.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 6) : ur c'hi •  
ur c'hazh • ur marc'h • ur plac'h •  
ur pemoc'h • ur vuoc'h • un tric'horn •  
ur roc'h • ur c'hloc'h • ur c'helc'h •  
ur c'harr-nij • c'hoari • c'hoarzhin • kelc'hiañ

## Fonologiezh :

- « c'h » a vez distaget [χ] e fin ar gerioù pa vez un ehan war-lerc'h (ur roc'h...)
- « c'h » a vez distaget [h] e diabarzh ar gerioù (un tric'horn...)

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

### 1. Prim

### 2. Kim

### 3. Jestraouiñ

### 4. Posupl eo pe n'eo ket ?

Lakaomp :

- *C'hoarzhin a ra ar c'helc'h.*
- *War ar porzh-skol e vez klevet ar c'hloc'h.*
- *Ur vuoc'h zo o c'hoari kartoù.*
- *Er c'harr-nij ez eus ur plac'h gant he marc'h.*
- *O livañ loened en ur c'haier emañ ar plac'hig.*
- *Emañ ar c'hi o lammat dreist ar roc'h.*

— SIZHUNVEZH 19 —

# Kentel 6


## C'h c'h

**Kentel 6**

### C'h c'h

ur c'hi ur c'hazh ur marc'h ur c'hoazh plac'h  
 etch' ur pemec'h ur c'hastell ur vuoc'h  
 ar c'hastell c'hoariva sach' un trichorn  
 ur c'hloazh ur c'hoazh ur roc'h ur c'krodedil  
 ur c'hloazh ur c'helc'h ur c'hannig ur c'hamera  
 c'hoari c'hoarzhin kelc'hañ warc'hoazh pelec'h  
 dimerc'her Ar Roc'h-Morvan Marc'harid

Ur c'hi zo o c'hoari en etch'.  
 Ar c'hastell zo poazh.  
 O c'hloazhet emañ ar vuoc'h.  
 E load ar c'hastell emañ ar plac'hig o c'hoarzhin.  
 C'hoariva a vo er Roc'h-Morvan warc'hoazh.



**Skol al loened**

Ur wech e oa ur plac'h, Marc'harid he anv, o chom en un ti-feurm gant ur c'hi du, ur c'hazh gwenn ha loened all, bras ha bihan. C'hoari skolig a was graet beg Merc'her. Marc'harid e oa ar vestrez-skol.

• Pelec'h emañ an trichorn ? a c'houlen Marc'harid.  
 — E-barzh ar c'helc'h ! a respont ar marc'h.  
 — Ket ! Pelec'h emañ an trichorn ? a c'houlen Marc'harid adare.  
 — E-kichen ar c'helc'h, a respont ar vuoc'h.  
 — Mestrel ! a lavar Marc'harid.  
 — Dising ! (Dising) ! a ra ar marc'h gant ar c'hloazh.  
 — Echu eo ar skol ! a huch ar vestrez-skol.  
 Skolig en o d'ouarn a ra an holl. Lakaen eo al loened. C'hoarzhin a reont.

**Skrivadoù :**

vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z, p, b, t, d, e, k  
**+ c'h**

**Labour skrivañ**

- Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.
- Skrivañ gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

**Deverioù**

- Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet her-vez barregzhioù hag ezhommoù ar skolidi.
- Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

**Poelladenn 2**

- Lenn an urzh-labour.
- Pep hini a lenn ar gerioù didrouz (pe chuchumuchu).
- Ar skolaer a lenn goustad ar gerioù a vouezh uhel. E-keit-se e vo ar skolidi oc'h heuliañ gant ar biz.
- Ar skolaer a lak ar gaoz war elfennoù ret ur frazenn : pennlizherenn ha pik. Ar skolidi a liv an div elfenn-se evit aesaat ar jeu.
- Lezel un tamm amzer d'ar skolidi evit skrivañ ar frazennoù.

- Lenn ar frazennoù skrivet a vouezh uhel.
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c'hla-sad a-bezh pe gant ar skolidi unan-hag-unan.

**Poelladenn 7**

- Lenn an urzh-labour.
- Deskrivañ ar skeudenn asambles dre gomz.
- Lakaat ar skolidi da skrivañ ur frazenn bennak din-dan an dresadenn. Evit sikour anezho e c'haller :
- Skrivañ ur goumoulenn gerioù war an daolenn.

ur c'hi ur c'hazh kartoù  
 c'hoari ur c'hazh  
 c'hoarzhin

- Skrivañ ur frazenn bennak war an daolenn evit boulc'hañ al labour.

Lakaomp : *Emañ ar c'hi hag ar c'hazh o c'hoari kartoù.*  
 — Reizhañ pe divankañ al labour er fin.

1 Gerioù pe gerioù ?

E-barzh ar c'helc'h emañ an trichorn.

E-kichen ar c'helc'h emañ an trichorn.

Ar vuoc'h e oa ar vestrez-skol.

2 Skrivañ frazennoù.

a. na. C'hoarzhin. plac'h. ar.

Marc'h. a gemer. Marc'harid. ar.

1 Lennadenn.

- Kelc'hañ an trichorn war ar c'haier.
- O c'hloazhet emañ ar pemec'h.
- C'hoarzhin a ra ar plac'h.

2 Kelc'hañ ha kopiañ.

- Ur c'hi du zo o c'hoarzhin.
- Ur plac'h zo o c'hoarzhin.
- Ur c'hazh gwenn zo o c'hoarzhin.

1 Klaskat ha skrivañ gerioù.



marc'h c'hoari c'hann

ur pe ur nij ur tri

2 Skrivañ ur frazenn.

C'hoari • abeg • a na • Marc'harid  
 • ar c'hloazh • ar vuoc'h

2 Skrivañ.

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 7.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 7) : ur sivienn •  
ul logodenn • ur favenn • un azen •  
ur farsadenn • ul lodenn • un doenn •  
ur valafenn • ur gazetenn • holen • loen •  
ur volenn • merenn • kempenn • diskenn •  
pourmen

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

### 1. Goustad

### 2. Kim

### 3. Jestraouiñ

### 4. Divinadelloù

Lakaomp :

— *War an holl tiez e vez unan. Glas-du e vez e Breizh ha ruz e Su Frañs. Petra eo? (un doenn)*

— *Lennet e vez alies diouzh ar mintin. Petra eo? (ar gazetenn)*

— *Ruz ha lipous e vezont. E Plougastell ez eus kalz anezho. Petra eo? (sivi, ur sivienn)*

— *Loened bihan int. Fourmaj-laezh a vez kavet mat ganto. (logod, ul logodenn)*

— *Nijal a ra a vleunienn da vleunienn en hañv. (ar valafenn)*


— SIZHUNVEZH 21 —

# Kentel 7 en enn

**en enn**

penn sivienn jirafenn ul logodenn ur favenn  
 un azen ur farsadenn ul lodenn un doenn kununenn  
 tomatezenn ur valfenn un dullepezen ur gazetenn  
 bolenn loen ur volenn bolotenn merenn melenn  
 gwenn kempenn gouleenn diskienn pourmenn  
 lenn e-kichen pegenn Youenn Gwenn

Pegen brav eo an dullepezen velen!  
 E-kichen ar jirafenn emañ al logodenn.  
 Hollen mar plij! a c'houlenn Youenn.  
 O nijal emañ ar valfenn wenn.  
 Kavet en deus ar favenn ha lakaet ur gurunenn war e benn.



**Loened iskis**

« Och ober petra emañ ar jirafenn ? a c'houlenn Tadiq.  
 — O lenn ar gazetenn emañ, a lavar Milo.  
 — Pegen iskis eo al loen-mañ ! » a lavar Mammig.

« Och ober petra emañ al logodenn ? a c'houlenn Tadiq.  
 — O livañ ur gurunenn emañ, a lavar Milo.  
 — Pegen brav eo ar gurunenn velen ! » a lavar Mammig.

« Och ober petra emañ an azen ? a c'houlenn Tadiq.  
 — O kempenn an ti emañ, a lavar Milo.  
 — Pegen jentil eo an azen-mañ ! » a lavar Mammig.

**Skrivadoù :**

vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z, p, b, t, d, e, k,  
 c'h + en-enn

**Labour skrivañ**

- Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.
- Skrivañ gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

**Deverioù**

- Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet hervez barregzhioù hag ezhommoù ar skolidi.
- Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

**Poelladenn 7**

- Lenn an urzh-labour.
- Deskrivañ ar skeudenn asambles dre gomz.
- Lakaat ar skolidi da skrivañ ur frazenn bennak dindan an dresadenn. Evit sikour anezho e c'haller :
- Skrivañ ur goumoulenn gerioù war an daolenn.

ur gazetenn  
 ul logodenn  
 lenn  
 divskouarn




1. Gwir pe gwr ?

O kempenn an ti emañ an azen. 


O lenn ar gazetenn emañ ar jirafenn. 





O livañ ar gazetenn emañ ar valfenn. 


2. Lennañ.




 • Emañ al logodenn o redek war-lec'h an azen.  
 • Emañ an azen o redek war-lec'h al logodenn.  
 • Pegen brav eo an dullepezen velen!

3. Klaskañ ha logiañ.




- O livañ ur gurunenn emañ al logodenn.
- O pourmen emañ an azen.
- O lenn ar gazetenn emañ ar jirafenn.

4. Skrivañ gerioù.

5. Klaskañ ha skrivañ gerioù.


  


ur va... ur vob... ur a...

6. Skrivañ ur frazenn.

Pegen • • • • •  
 • • • • •  
 • • • • •  
 • al logodenn!  
 • ar jirafenn!

7. Skrivañ.





- Skrivañ ur frazenn bennak war an daolenn evit boulc'hañ al labour.
- Lakaomp : *Bras eo divskouarn al logodenn.*
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin.

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 8.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 8) : ur ran •  
un amprevan • un oan • un avank •  
ur c'hañval • un dañvad • ur banne • amann •  
ur bank • azezañ • keginañ • moan • buan

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

### 1. Prim

### 2. Kim

### 3. Jestraouiñ

### 4. Divinadelloù

Lakaomp :

- *Emañ ar c'hañval oc'h azezañ war ur bank.*
- *Emañ mammig o keginañ gant amann sall.*
- *Emañ an dañvad o tañsal gant an oan hag ar ran.*
- *Buan e lamm ar ran.*
- *Un amprevan zo war an amann.*

— SIZHUNVEZH 23 —

# Kentel 8

## an ann añ

**Kentel 8**

### an ann añ


ur ran un ampreon un avank un oifant un oan  
 ur c'hañval un dañvad ur banne amann fank ehan  
 ur vantell ur bank an tan ur majisian ur c'horigan  
 man unan kant buan dedan orañjer moan  
 emañ azezañ evañ kanañ keginañ livañ pegañ  
 tresañ profañ skrivañ azezañ dindan gant ennañ  
 amañ bremañ Chann Gurvan Lokourman Japan

Poent eo azezañ war ar bank bremañ!  
 Emañ Yann oc'h evañ ur banne chug orañjer.  
 Dañsal a ra an oan hag an dañvad er park!  
 « Setu amann evit keginañ », a lavar Gurvan ar c'horigan.  
 Tomm-kenañ eo, tan zo e ti Chann!



### Ar majisian

Loened farsus zo e ti ar majisian. Dañsal a ra an avank. Lammat a ra ar c'hañval. Kanañ a ra an oifant hag an dañvad. Pebezh cholori!  
 « Skuzh on gant an trouz! » a lavar ar majisian.  
 Dañsal, lammat ha kanañ a ra al loened arav.  
 « Urav, deou... abedudabara! a lavar ar majisian.  
 — Pelec'h emañ bremañ? a c'houlenn ar c'horigan.  
 — Sell, azezet int war ar bank. »  
 Emañ ar c'hañval o deviañ, an oifant o livañ hag an dañvad o tresañ. Pegen fur eo al loened bremañ!



**Skrivadoù :**  
 vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z, p, b, t, d, e, k,  
 c'h, en-enn + **an-ann-añ**

- Labour skrivañ**
- Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.
  - Skrivañ gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

**Deverioù**

— Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet hervez barrezhioù ar skolidi.  
 — Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

1. Gwir pe gwr?


Kanañ a ra ar majisian.

Kousket eo an oifant.

Dañsal a ra an avank.

Tresañ a ra an dañvad.

2. Lenn-mañ.




- Kanañ a ra an avank.
- Dañsal a ra an dañvad.
- Fachañ a ra ar majisian.


3. Kalc'hiad ha koptañ.

- O kousket war ar bank emañ an dañvad.
- O kousket dindan ar bank emañ an oifant.
- O talsal emañ Chann.

4. Skrivañ gerioù.




5. Klasket ha skrivañ gerioù.



6. Skrivañ ur frazenn.

Dañsal =  a ra c'horigan.  a berrg ar fank.  a berrg ar fank.

Skrivañ =  a ra.  an diffad.  an diffad.  an diffad.



# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 9.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 9) : ur maligorn •  
ur gazeg • un tog • ur madig • ur redadeg •  
ur bisig • geot • godell • ur gegin • gwez •  
gwastell • ur gwele • gortoz

**Fonologiezh :**

— Al lizherenn «g» a vez distaget [k] a-raok  
un ehan-komz (ur gaze**g**, ur bisig**g**...).

**A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù**

Gwelet pajenn 41.

**B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù**

Gwelet pajenn 42.

**1. Goustad**

Lakaomp : *gwez, maligorn, tog, gwastell...*

**2. Kim**

**3. Lenn war ar muzelloù**

**4. Divinadelloù**

Lakaomp :

— *Parez ar marc'h eo. (ar gazeg)*

— *Babig ar c'hazh eo. (ar bisig)*

— *En da gambr ez eus unan. Kousket a rez warnañ.  
(ar gwele)*

— *Lakaet e vez war ar penn evit mont er-maez  
a-wechoù. Ront pe begek e vez. (un tog)*



# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er gentel 10.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 10) : ur furlukin •  
un delfin • ribin • ur poñsin • ur rinkin •  
un diñs • an dijuniñ • rezin • pinvidik •  
beajiñ • dihuniñ • flapiñ • kampiñ

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

### 1. Goustad

### 2. Kim

### 3. Lenn war ar muzelloù

### 4. Divinadelloù

Lakaomp :

- *Un hent bihan war ar maez. (ur ribin)*
- *Frouezh eo. Glas pe mouk e vezont. (ar rezin)*
- *Pred kentañ an devezh eo. (an dijuniñ)*
- *Ur fri ruz hag un dremm gwenn a vez gantañ alies.  
Lakaat a ra an dud da c'hoarzhin. (ur furlukin)*
- *Ur pesk bras eo. Dent lemm en deus. (ar rinkin)*

— SIZHUNVEZH 27 —

# Kentel 10

## in iñ

**Kentel 10**

### in iñ


ur furlakñ un delenn ul lapin ar gegin ur vilin  
 mañson ribin jadin ur paññ un irinñ ur sabin  
 ar c'hazin un heareucñ ar fin un difa ur brisaz  
 an djanit sardin tintin rezin pinedik mbin  
 beajiñ debriñ digeriñ echuiñ jediñ seroit  
 dihunñ flapit kampit dindan a-benn ar fin  
 Matlin Marzhin Trifin Gwerfokin Finland India

Matlin zo er gegin o tebriñ sardin.  
 An delin zo o flapit er c'hazin.  
 Bet eo Marzhin o kampit e jadin tintin Mari.  
 Chug rezin a vo mat da zijuniñ.  
 Pev ar lapin ha daou boññ zo dindan ar sabin.



### Sac'h Milo

Emañ Milo o flapit gant Liza er ribin. Kalz traoù zo e sac'h Milo :  
 un delenn, ur sac'h-kouezet... Pounner-kenañ eo.  
 « Pebezh sac'h evit mont d'ar skoll a lavar Liza.  
 — Mont a ran da gampit! a lavar Milo.  
 — Pegen chik! Pijout a rafe din mont ivez », a lavar Liza.  
 Ha dao! Aet eo Milo kuit, o vale mbin.  
 « Chom a rin ma-unanig », a lavar Liza, a-benn ar fin.



### Skrivadoù :

vogalennoù, l, r, m, s, ch, f, n, v, j, z, p, b, t, d, e, k,  
 c'h, en-enn, an-ann-añ, g + in-iñ

### Labour skrivañ

- Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.
- Skrivañ gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

### Deverioù

- Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet hervez barrezgioù ar skolidi.
- Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

### Poelladenn 8

- Lenn an urzh-labour.
- Pep hini a lenn an destenn didrouz (pe chuchumu-chu).
- Ar skolaer a lenn goustad ar frazennoù a vouezh uhel. E-keit-se e vo ar skolidi oc'h heuliañ gant ar biz.
- E c'haller skrivañ ur goumoulenn gerioù evit sikour skrivañ war-lerc'h :

beajiñ debriñ  
 lenn  
 livañ beginañ

1. Gwir pe gwr ?  
 Flapit a ra Liza ha Milo.  
 Mont a ra Milo da gampit.  
 Pounner eo sac'h Liza.

2. Liemmet.  
 Liza :  
 • Mont a ra da gampit.  
 Milo :  
 • Chom a ra he-unanig er ribin.

3. Kalc'hoññ ha bagañ.  
 • O kampit e-barzh un delenn emañ Matlin.  
 • O kouezet er jadin emañ Trifin.  
 • O kampit e-barzh an ti emañ Célestine.


4. Skrivañ gerioù.  
 je di nür del rim vi fur hin li

5. Klasket ha skrivet gerioù.  
 fur hin din  
 ar rün sar an del

6. Lenn ha breual.  
 C'hoari a ra Matlin gant ul lapin rous.

7. Skrivañ ur frazenn.  
 Debut a ra :  
 • ar din.  
 • he lapin.  
 • er gegin.  
 • er jadin.

8. Skrivañ.  
 Pijout a ra din redik war an aod ganit.  
 Pijout a ra din \_\_\_\_\_ er broioù pell ganit.  
 Pijout a ra din \_\_\_\_\_ ganit.  
 Pijout a ra din \_\_\_\_\_ ganit.  
 Pijout a ra din \_\_\_\_\_ ganit.



- Reizhañ pe divankañ al labour er fin, gant ar c'hlasad a-bezh pe gant ar skolidi unan-hag-unan.

# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz. Lennet e vint war-lerc'h er gentel 11.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 11) : ul liv • liesliv • riv • div • divskoaz • divjod • ur c'havr • fav • glav • pav • tanav • brav • ur burev • blev • ur vlevenn • tev

**Fonologiezh :**

— An doare da lavaret gerioù zo a c'hall cheñch hervez ar broioù : ur c'havr, fav, glav...

**A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù**

Gwelet pajenn 41.

**B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù**

Gwelet pajenn 42.

**1. Goustad**

**2. Kim**

**3. Lenn war ar muzelloù**

**4. Divinadelloù**

Lakaomp :

— *Gant laezh al loen-se e vez graet fourmaj. (ar c'havr)*

— *Melen, du, ruz, gris, gwenn, hir pe berr e c'hallont bezañ. Troc'het e vezont e ti ar perukenner.(ar blev)*

— *Ur pezh arrebeuri eo. Unan zo er c'hlas, evit ar skolaerez. (ur burev)*

— *Plik, plok ! N'eo ket brav an amzer hiziv. (ar glav)*



# Deskiñ gerioù dre gomz

Desket e vo anaout gerioù ha patromoù dre gomz.  
Lennet e vint war-lerc'h er c'hentelioù 12 da 16.

**Gerioù da zeskiñ** (kentel 12 da 16) : teurel •  
traezh • nijal • mezh • ur melezour •  
ur goubenner • un euzhvil • un houad •  
un houadez • houldi • ur vrañsigell •  
ur skornenn

## A. Deskiñ gerioù nevez gant skeudennoù

Gwelet pajenn 41.

## B. C'hoarioù evit deskiñ gerioù

Gwelet pajenn 42.

1. Prim

2. Kim

3. Jestraouiñ

4. Posupl eo pe n'eo ket ?


## — SIZHUNVEZH 31 —

## Kentel 12

## An dartezenn chokolad

**An dartezenn chokolad**

Fest zo e ti Milo. Kamaraded zo o tonn.  
Emañ o kas un dartezenn chokolad war an daol.  
« Diwall, Milo ! » a lavar Tadig.  
Badadaou ! Kouezhet eo Milo war e benn en dartezenn.  
« Ding ! »  
« Demat », a lavar Milo, du e fri gant chokolad.



1. Gwir pe gaez ?  
Un dartezenn chokolad zo evit kamaraded Milo.

Kouezhet eo Milo war al leuzi.

Mammig a lavar : « Diwall, Milo ! »

2. Debet :  
Perak ez eus kamaraded e ti Milo ?

Perak eo du fri Milo ?

3. Kalc'hañ ha kopiañ.  

- Kouezhet eo war e benn er gram-pouezhenn.
- Kouezhet eo war e benn en dartezenn.
- Kouezhet eo an dartezenn war e benn.

## Labour skrivañ

► Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.

► Skrivañ gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

## Deverioù

— Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet hervez barregzhioù ar skolidi. Lenn poelladennoù zo en-dro.

— Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

4. Lenn ha brevañ.

Div dartezenn zo war an daol : unan gant sivi hag unan gant chokolad.

5. Skrivañ frazennoù.

Milo Du fri 20

kamaraded a oa Milo Cheazhfin.

6. Klaskat an destenn gant ar gerioù.

kamaraded an den-degen kousket diwall dibab

- Debet e vo \_\_\_\_\_ stroñs fenoz.
- Kanañ brav a ra \_\_\_\_\_ Tadig ha Mammig.
- Hopala, \_\_\_\_\_ eo ar c'hazh diwar ar gador.
- \_\_\_\_\_ ouzh an otoiou, darjenus eo !
- Laezh tomm gant \_\_\_\_\_ a gavan mat-tre.

7. Astenn ar frazennoù.  
Fardet en deus Tadig un dartezenn.

## Poelladenn 2

— Lenn an urzh-labour.

— Pep hini a lenn ar goulennoù didrouz (pe chuchumuchu).

— Ar skolaer a sikour ar skolidi da gompren ar goulennoù ma vez ezhomm.

— Ar skolidi a ginnig respontoù dre gomz. Skrivet e vo war an daolenn gant ar skolaer.

Lakaomp :

— Perak ez eus kamaraded e ti Milo ?

Ur fest zo e ti Milo.

— Perak eo du fri Milo ?

Kouezhet eo en dartezenn chokolad.

— Lezel un tamm amzer d'ar skolidi evit kopiañ ar frazennoù, pe kopiañ tammoù frazennoù nemetken ha klokaat anezho o-unan.

— Reizhañ al labour er fin.

8. Skrivañ.



9. Skrivañ ha brevañ.

Fest zo hiziv e ti

Debet e vo \_\_\_\_\_

## Poelladenn 7

- Lenn an urzh-labour.
- Pep hini a lenn ar frazenn didrouz (pe chuchumu-chu).
- Ar skolidi a ginnig gerioù evit astenn ar frazenn. Ar skolaer a skriv anezho war an daolenn.

Lakaomp :

Fardet en deus Tadiq un dartezenn...

chokolad      avaloù  
fall      sivi      bihan      bras  
mat      er gegin

- Frazennoù hir pe hiroc'h a vo skrivet, hervez barre-gezhioù ar skolidi :

Lakaomp :

- *Fardet en deus Tadiq un dartezenn lipous / gant chokolad / ha per.*

- Lezel un tamm amzer d'ar skolidi evit kopiañ pe skrivañ o-unan gant sikour ul listennad gerioù.
- Lenn ar frazennoù skrivet a vouezh uhel.
- Reizhañ pe divankañ al labour er fin.

## Poelladenn 9

Frazennoù a c'hallfe ar skolidi skrivañ :

- *Fest zo hiziv e ti Mona ha Tudi !*
- *Debret e vo tomatez hag un dartezenn gant sivi.*





## — SIZHUNVEZH 34 —

# Kentel 15

## An euzhvil

**Kentel 15**

**An euzhvil**

Kouezhet eo Liza disar he gwele en noz-mañ.

« Mammig! Mammig! Mammig! » a huch Liza, o lelvarl.

— Petra zo, ma douzig ? a c'houlenn Mammig.

— Klevez 'm eus un euzhvil dindan ma gwele, a respont Liza.

— N'eus euzhvil ebet, a lavar Mammig. Ur gweallhurve 'peus graet.

— Sur out ? a c'houlenn Liza.

— Lavar din penaos e oa da euzhvil. Kefek gant ur genoù nuz ? Nijal a rae dreist ar gwele ?

— Ya, evel-se e oa ! Gwelet 'peus anezhañ ivez ? a c'houlenn Liza, laouen.

— Evel-jont, graet 'm oa ar memes gweallhurve pa oan bihan, a lavar Mammig. Noz vat, ma douzig !

1. Gwir pe gaez ?

Un euzhvil zo dindan gwele Liza.

Dindan gwele Mammig ez eus un euzhvil ivez.

Fachet eo Mammig ouzh Liza.

2. Respont.

Pelec'h emañ Liza ?

Petra he deus gwelet o nijal ?

Penaos e oa an euzhvil ?

3. Kefek 'm ha kopial.

- Azezet eo Mammig war gwele Liza.
- Azezet eo Liza war he gwele.
- Kouezet eo Mammig war gwele Liza.

### Labour skrivañ

► Kopiañ gerioù ha frazennoù war ar c'haier brouilhed pe ar c'haier pemdez.

► Skrivañ gerioù ha frazennoù diktet gant ar skolaer, war ur sklentenn pe war ur c'haier.

### Deverioù

— Lenn un dibab gerioù ha frazennoù islinennet hervez barregzhioù ar skolidi. Lenn poelladennoù zo en-dro.

— Lenn an destenn en-dro pe un tamm anezhi.

4. Lenn ha tresañ.

Gwelet em eus un euzhvil gant daoulagad mouk ha divskouarn bras er jardin.

5. Skrivañ un frazenn.

pa an an den gwelet bihan Indig an gweallhurve

6. Klaskat an destenn gant ar gerioù.

douzig dindan laouen nijal

- \_\_\_\_\_ uhel a ra ar givennil.
- Laouen eo ma \_\_\_\_\_ Seizh vloaz eo hiziv.
- Ober tro ar bed war vag eo ma \_\_\_\_\_
- Aet eo Mamm-gozh da guzhat \_\_\_\_\_ an daol.

7. Adenn ar frazennoù.

Spontet eo.

8. Tresañ un euzhvil he deskrivañ anezhañ.

### Poelladenn 8

— Lenn istor *An Aerouant bras ha gwer* :

<https://eskolaer.org/spip.php?article55>

— Tresañ un euzhvil war an daolenn ha deskrivañ anezhañ asambles. Lakaomp : *Ur fri hir en deus. Ur genoù bras ha mouk en deus.*

— Lenn an urzh-labour.

— Sevel div goumoulenn gerioù asambles, anvioù eus un tu hag anvioù-gwan eus an tu all. Lakaomp : *ur genoù, ur fri, blev, hir, bihan, tev, moan, ruz, melen, gwer...*

— Lezel un tamm amzer d'ar skolidi evit tresañ hag evit skrivañ.

— Reizhañ pe divankañ al labour.

— Diwezhatoc'h, goulenn digant skolidi zo lenn o zentenoù. Ar re all a ra tresadennoù hervez ar pezh a gomprenont.

— Keñveriañ an tresadennoù.

9. Skrivañ.

Pe anv 'peus ?

Pelec'h emañout o chom ?

Pe oad out ?

### Poelladenn 9

— Lenn an urzh-labour.

— Pep hini a lenn ar frazennoù.

— Klask respont asambles dre gomz.

— Lakaat patromoù yezh war-wel, ma vez ezhomm :

*Peseurt anv 'peus ?* ► ... eo ma anv.

*Pelec'h emañout o chom ?* ► E ... emañ o chom.

*Pe oad out ?* ► ... on.

— Lezel un tamm amzer d'ar skolidi evit skrivañ.

— Reizhañ pe divankañ al labour er fin.



# Evit deskiñ gerioù nevez

Diwar skeudennoù e vo dizoloet gerioù nevez peurliesañ e *Li Lo Lenn*.

## Pazenoù an deskiñ :

1. Da gentañ e vo diskouezet ar skeudenn d'ar c'hlasad (war ar skramm pe war ur gartenn flash). Deskrivet e vo gant ar skolaer. Lakaomp :

Skolaer. — *Setu lasoù. Bep mintin e vez skoulmet start ma lasoù ganin a-raok mont d'ar skol (jestraouiñ). A-wechoù e ran daou skoulm zoken! Lasoù du zo war ma botoù.*

2. Kuzhat ar skeudenn ha lavaret ar gerioù a vouezh uhel.

Skolaer. — *Soñj ho peus eus ar skeudenn? Petra e oa?*

Skolidi. — *Lasoù.*

Skolaer. — *Ya, lasoù. Lasoù ar botoù.*

3. Lakaat ar skeudenn ouzh ur voger e «korn ar gerioù».

— Ar gerioù-se a vo adkavet war-lerc'h er c'hentelioù deskiñ lenn. Koulskoude, ne vo ket klasket deskiñ kement ger a vo da lenn war-lerc'h. Gerioù zo a c'hallo bezañ dizoloet diwar lenn anezho ivez. Neuze e vo displeget gant ar skolaer petra a dalvezont, evel-just.

— Da bep skolaer eo da zibab ar gerioù hervez ezhommoù e glasad. Arabat degas re a c'herioù nevez en un taol.

— Ur wech dizoloet ar gerioù evel-se e vint eñvoret dre c'hoarioù (gwelet «Un dibab c'hoarioù evit deskiñ gerioù», p. 42).

*Il faut savoir que la récupération des mots en mémoire est étroitement liée à la nature et la qualité de leur encodage, c'est-à-dire la manière dont il a été enseigné, appris et stocké. On ne peut avoir accès à une information qu'à partir des indices ou des liens sémantiques utilisés lors de son apprentissage (Chiet Koeske, 1983; Chi, Hutchinson et Robin, 1989; Cellier, 2017).*

*Il ne suffit donc pas de montrer et de nommer les images. Il faut aussi proposer aux jeunes élèves de multiples liens sémantiques qui relient un même mot à plusieurs autres de la même catégorie ou de catégories différentes pour faciliter et organiser le stockage. Par exemple, la souris est un animal, elle ressemble au rat; elle est petite; elle a 4 pattes comme ... mais pas comme ...; la souris a des poils, comme ... mais pas comme ...; la souris a une longue queue comme ... mais pas comme ...; elle adore manger des miettes de pain, du gruyère, parfois du papier...*

Narramus, *La sieste de Moussa*,  
Retz, p. 17

— Dre abadennoù berr e vo desket ar gerioù nevez (15 munutenn, 20 munutenn) meur a wech bep sizhun.

— Arabat ankounac'haat degas soñj eus ar gerioù bet desket abretoc'h er bloavezh-skol bep an amzer, kuit da zisoñjal anezho.

# Un dibab c'hoarioù evit deskiñ gerioù

## 1. Prim!

Diskouez prim-tre ur gartenn flash. Goulenn digant ar skolidi lavaret ar ger.

## 2. Goustad

Goloiñ ur gartenn flash gant ur follenn baper tev. Tamm-ha-tamm, goustad, diskouez lodennoù eus ar gartenn. Lakaomp, tennañ ar follenn baper tev dre zindan. Pa vo gouest ar skolidi da anaout ar skeudenn e vo lavaret ar ger ganto.

## 3. Kim

Lakaat ar c'hartoù flash ouzh an daolenn, pe war un daol, o lavaret o anvioù. Lezel amzer d'ar vugale da eñvoriñ plas ar c'hartoù flash. Goulenn diganto : « Mouchit ho taoulagad! » Tennañ 1, 2 pe 3 c'hartenn flash. Goulenn digant ar skolidi digeriñ an daoulagad ha kavout peseurt kartoù zo bet kuzhet.

Skolaer. — *Mouchit ho taoulagad!*

Skolaer. — *Digorit ho taoulagad!*

Skolaer. — *Peseurt kartoù a vank?*

Skoliad. — *Chuchumuchu ha mouar a vank.*

## 4. Lenn war ar muzelloù

Divinout ar gerioù lavaret didrouz gant ar mestr-skol. Evit aesaat ar jeu e c'haller lakaat skeudennoù war-wel ouzh an daolenn.

## 5. Jestraouiñ

Ober jestroù a bep seurt ha goulenn : « Petra eo? » A-wechoù e c'haller ar skolidi jestraouiñ ivez e plas ar skolaer. Evit aesaat ar jeu e c'haller lakaat skeudennoù war-wel ouzh an daolenn.

## 6. Divinadelloù

Lavaret e vo un divinadell gant ar skolaer div wech, a-benn ma c'hallfe an holl skolidi klask ar respont. Degemeret e vo respontoù ar skolidi war-lerc'h an eil lennadenn hepken. Ma n'eo ket ouzhpenn dezho e klasko ar skolidi sevel divinadelloù o-unan ivez.

Lakaomp : *Ul loen rous eo. Pevar fav en deus. Debriñ a ra yer a-wechoù. Piv eo? Respont : ul louarn.*

## 7. Posupl eo pe n'eo ket?

Lenn frazennoù bet skrivet gant ar gerioù a zo da zeskiñ ha goulenn : « Posupl eo pe n'eo ket? »

Skolaer. — *Sili zo er stêr. Posupl eo pe n'eo ket?*

Skolaer. — *Mouk eo ar sivi ar bloaz-mañ. Posupl eo pe n'eo ket?*